

Da eur Vam Kri a Dinatur

Var don : AR ROUE GRALON

1
Silaouit kanno kristeignen
A c'hui a glevo a dra sorten
Kanna eur wers en traesusse
Na so bet klevet dre ar vro-man.

2
Gret deur vam kri a dinatur
Leuskas da vervel y c'hroadur
O sonjal kusa y fehet
Setu penos eo tremenet.

3
Dan navet derves a vis du
Ia ar vam kri a dinatur
Da deier heur goude kreisteis
Ma oa gannet ar bugel se.

4
Pe voa gannet ar bugel se
E pad diou eur ia da houde
In de devēus in lesset abandonnet
Sonjal vije kentoc'h marvet.

5
Pa oa miro ar bugel se
Hy teuas din mailliura goude
Neur serpillier in korn i hamp
Evit y husa sortennamant.

6
Daou-sevet sorten a seo bet
Ar bugel in korn ar gamp kusat

Ken a teuas in song ar vam
Penos ober y interramant.

7
Marie-Anne Douerin ar h-kruella
A meus bet klevet konta dre ar vroman
A neus tennet deus y godel
Eur gontel da sraillia y bugel.

8
Y ben a drohas da gentan
Y siou vrekhou goude a gredan
A goude y sivisker
Ive i gorl dre an nanter.

9
Neur ober i labour bemde
Ar plakh kounaret didrue
Eun tam bemde a lakas en tan
Da ober i interramant.

10
Pouahet a vije y relegou
E neur ober i labourriou
Ia o sonjal dre ar pouense
Kusa i fehet deus ar bed.

11
Doue en deveus permetet
A vije ar h-krim disoloet
Ker Locronan a vurmuras
Ar justis di si a neum rentas.

12
Ar jandarmet a medeusin
Da velet Marie-Anne Douerin
Relegou ar bugel o deus kavet
E bars en tan hanter devet.

13
Essa e ra e nem kusa
Mes meumestra a sisklerias
Penos e voai bet dougueres
Deus y breur ker neus layaret.

14
Neusen e bars in mis kenver
Er h-kourdassise ar Finistère
A seo bet interrojet
A deveus eno diskleriet.

15
A devoa gret sé dre goler
In dismegans in pop amser
Da vesa bet abandonnet
Gant an nini a neus i s-tr

16
Meumes tra a seo bet k
Euekh bloaves pri
Skouer da ol merh
Nonpas donnat da ob

Y K'HLEMOU GUIRRION

Var don : AR VEREN

1
Mar on koueset en n'umourouset
Ar brassa diskras ma so er bed
Gras deoc'h groages kristen
Na goueferc'h ket flaneden

DISKAN

Mar beo ken kri ma flaneden
Petra a so kos nimet ar bresel.

2

Mar vije bet gane bemdes
Mar guir briet hanvet Pernes
Ne voan ket kondanouet Prison
E meskh neutreien difeson.

Diskan

3
Komprenit eta ebars ma glahar
An dismegans var an douar
Defot kavet ma muia karet
Da derri ma flaneden galet.

Diskan

4
Mar vije bet ma briet en hichen
O henel ma bugel a dra sorten

Daoute dam foan se voa netra
Nimet plijadur leun a joa.

Diskan

5

Ar falla impaler me a gred
O hada ar glahar dre ar bed
Bars en neil feson pe ni ben
A reio poan speret dan den.

Diskan

6

Mar beo ma briet disparisset
In komansamant ar bresel me a gred
Kos en n'impaler ar falla
Neus laket meur da plakh da ouela.

Diskan

7

Mar na glevin kin breman
Kleier Locronan o vrallan
Dam gelven bep sul dan noverren
In kompagnunes argroaget kristen

Diskan

8

Me za dar prison me a gret
Evit rapari ma fehet

A da hirvoudi gant glahar
Demp muia karet var an douar.

Diskan

9

Pa sonjan en amser dremenet
In kompagnunes ma briet
Bars en nunion ar vrassa
A fel sur damp c'halon ranna.

Diskan

10

Ma ol flugadur a so tremenet
Na meus nimeit glahar var ar bed
Na gavin kin an nevrustet
In kompagnunes ma briet.

Diskan

11

Ra vesu fin dant trubuilliouman
A dam buc var ar bedman
Ma nem gavin bars ar joaiou
Gant ma briet bars en nevou.

DISKAN

Neuse a vesu fin damp flaneden
Fin damp glahar a damp bresel.

Hervé TILLY.